

ZON

Brezel a Blavez Perzek a Pemzek

TON NEVEZ



1^{er} Couplet

En kenta a viz eost, er bla naoutek kant perzek
Da Franç gant an Allemagn ar brezel zo deklaret
Setu gouarner a Franç, zeteu a neuz galvet
An dud da zifen o bro, deuz ar Brussianet.

2

En pewart horn a Franç, partout zo affichet
Tit anonec dan dud, a oyant mobilizet
Pa en pep parouz lakat er hloh en bral
Tit anonec dan dud, vije red partio ractal.

3

An dud partio duztu, da hazern do depot
Hortoz bean kaset, trezek ar frontiero
Vit an tad hag ar vam, vel difet zad or buguel
Monet da kuill y oad, oar dachenit ar brezel.

4

Arzuz a he ive, nag evit ar groagué
Bet e red do he red do mesah, partio dan armé
Ene red partio, na jerv gket laret
E partio duztu, pe bez an punisset

5

Oaket galvet zoudardet Franç, mad oah gant ar Republic
A oa zoudardet Guill daou, don mad barz er Belgic
En Empereur a hriminal, nivoa an hardianz
Da lavaret da monkluk, donnet dre Velgic in Franç.

6

Mez setu Albert neuze, ag a neuz bet fachel
Ha tielo dan Empereur, duztu a neuz kaset
Me ho ped eta messan, o na pe veh otron
Dremeniket oar ma douar, hep labourat o harmou.

7

Mez setu Guillaume, neuz duztu a neuz klevet
Neuz leuzket houezek kor d'armée, oar paoukez Belgic
Tientan plaç divoa koet oar forou Liège.
Distruzget a deuit ar fort, red dud partio mez.

8

Pe deuit diztruget ar fort, neuze e man deuet
Beteg ar guer ar Charleroy, ken vonuz a kerzet
Pe neuit aru en Charleroy, a deuit bet arretet
Pe ne aru ar Francizién, da zikour ar Velget.

Eno zo bet eur gombat, deuz are valeuiruzan
O ia kolet a meb bet kalz, o ia dimeuz on nezan
O ia oar ar blenen ze, zo malerugen chomet
Ia kalz a oad kriztenien, a zo laket da redek.

Kri e goelet a zo roet don den y heun ar pouvoar
Da lakad kemet a oad kriztenien, da rual oar an douar
Skijo a rer o zonzal, er framasson miliet
Neuz houet dre ho an tan goal, hep na raizon na zujet.

Ordenet a oa da von Kluck, a digant ar homprin
Reche dont da vombardi, a dier vraz dimeuz a reinz
Bombardet a deuit ar dier, er gatedral deuit poanet
onjet ta ar maleurio a zo bet aruet.

Enepereur Guillaume daou, heneuz zo den di fe
Nag o len dirilizion, nag on den dizoue
Goude heit bet deuet, beteg Meaux a Pontoiz
Deza lonet oar Bariz gant or vanden ramage.

O ia ar met da Bariz, o na neiket deuet
Distbet deuit oar o hiz, prima ma deuit galet
Mezriman me deuit galet, deuit kemeret an teh
Na neuket bet amzer, da zelet oar o lerh.

A neuze beteg ar Marn, a mem bet o kaset
Non halompad oar o lerh, evel dud dichadenet
Barz a gombat deuz ar Marn, a-memp bet ar victoir
Kemeromp ar joyuztet, braman leh on glahar.

Marteze a peuz zonzj, deuz ar bla dek a truguen
Pemp miliar a divoant bet laeret dar Francizien
O mez ar vej man alaz, leh kavet miliarou
Tud Guillaume a nivo recevet boulejou.

Ar zonz man zo kompozet gant or hanfart yoank
Neuzket a zizkadur, nag etudiamant
O ia ker neiket bet, pel oah er skolajo
A na neuzket a talant, evit gant rimo.

Marteze peuz hoant da glevet y hano badean
E he Ervoan e Falher deuz a vourg Zanegan
Ia gant neubet a amzer, ar zonz man zo kompozet
Izkuizet anon ta tud yoank evit pez meuz lavaret.

Ervoan e FALHER,

Deuz Bourg Zanegan en Komune Kerien

Propriété réservée à Pierre JOUAN, Carnoët